

I - Kavet roud eus Lasa

« Kavet ez eus roud eus Lasa ! »

Edo ar gerioù-se o treiñ e penn Aada endra ma oa o labourat evit sevel ur grugell war dorgenn Gwennan. En dervezhioù hirañ eus ar bloaz edod, tomm an amzer. Krog oa an heol da ziskenn diwar lein bolz c'hlas an oabl.

Diouzh ar beure en doa Aada klevet an nevezinti digant ur marc'hadour bouc'hili-maen. Diouzh ledenez Keignog, er c'hornaouog, edo o tont. E-pad un tachad e oa bet Lasa eno o chom. Freuz bras a oa bet savet etrezañ ha penn-kadour ar meuriad hag aet ar paotr yaouank kuit etrezek ar c'huzh-heol.

Breur Narki, gwreg Aada, e oa Lasa, ur paotr yaouank-flamm anezhañ. Daoust dezhañ bezañ ganet ha savet en ur meuriad kourerien, e oa troet-bras gant ar vuhez ouez. Aada en doa desket dezhañ chaseal ha pesketa, evel m'en doaeñ desket gant e hendadoù. Dispenn roudoù an anevaled gouez ha lazhañ anezho. Deskiñ diouzh ar gontel-vaen, ar vouc'hal, ar wareg, ar goaf, ar vatalm. Pesketa eo a blijfe dezhañ dreist pep tra. Splujañ er mor don diwar gern ar reier uhel ha serzh, ha tapout krog er pesked spouronet. Gouren en doa desket digant Aada ivez, en em gannañ ouzh an enebourien, bezañ gouest da werzhañ ker e vuhez. Da vrezelour eo e felle da Lasa mont ha n'eo ket chom da ziwall deñvedigoù ha troc'hañ buzbug.

P'edo Sarka, e penn e strollad kadourien, o kuitaat an Dolenn, edo skoachet Lasa a-dreñv ur roc'hell, o sellet outo, dour en e zaoulagad. Nag a avi en doa outo. « Poent pe boent ez in d'o heul, » en doa lavaret outañ e-unan.

« Oc'h huniñ emañ, Aada ? »

Edo rener al labourioù o skeiñ war e skoaz gant e zorn. Mall e oa lakaat bec'h. Meur a loariad oa edont o sevel ar grugell, war ur roz uhel a-zioc'h an draoñienn. Ur gambr war-gelc'h, tri gourhed ledander dezhi, un trepas enk a bemp gourhed

hirder o kas di. Mein sav ledan a oa oc'h ober an dro d'ar gambr, hag a bep tu d'an trepas. Bremañ edo ar vicherourien o verniañ mein blat an eil re war-c'horre ar re all evit sevel toenn ar gambr. Pep renkennad vein o kaout un tammig levezon war ar renkennad a-zindan. Evel-se e vefe bolzennet brav lein ar gambr.

Ur bobl a dud a oa o vec'hiañ war-dro ar grugell. Lod anezho a oa o tennañ mein bihan ha krenn diouzh an torraodoù, lod all o tougen anezho war gravizhi prenn, daou waz a bep penn. Ur re bennak a oa o tistagañ mein bras ha ledan diouzh reier an aod. Evit gellout faoutañ ur pezhriad roc'h e veze kleuziet ur renkennad toulloù don gant bouc'hili-maen. Neuze e vez sanket gennoù koad sec'h-korn en toulloù-se ha taolet dour warno, forzh pegement. En ur goeñviñ gant an dour e lakae ar gennoù ar roc'h da faoutañ hag ar maen da zistagañ. E-traoñ an aod e oa aesoc'h ha difraeoc'h ar faoutañ. Ar mor a zeue dioutañ e-unan da c'hlepañ ar gennoù. Gant al lanv e veze kaset ar vein d'ar gourlen, keffioù gwez stag outo. Da vont betek lein ar roz e veze ruilhet ar vein vras war gefioù diskourr, war-bouez ereoù lêr kreñv.

Gant un toullad paotred all edo Aada o renkañ ar vein blat evit sevel ar volz. Labour lugut war hir

amzer. Ret e oa mont goustadik, kavout e lec'h resis da bep maen. Stardañ mat anezho, o gennañ kenetrezo. Kreñv ha diabeg e ranke ar volz bezañ, rak bernioù mein pounner a vefe lakaet war he gorre goude-se d'ober kern ar grugell. Evit lakaat korfoù marv tud ar veuriad e oa ar grugell. Ken ha neuze e vezent douaret e toulloù dister. A-benn ma vefe peurechu ar savadur e vefent enoret en un doare dereat ha torret o c'hounnar d'an doueed da heul.

Sevel a reas Aada e gein diwar e labour ha sellet ouzh ar vro, e-ser evañ ur banne dour diouzh ur bodez pri. En traoñ d'ar roz, war-zu ar sav-heol, e oa ur saonenn c'hlas, ur stêr ledan o kammigellat drezi hag o vont da bakañ ar mor bras eus tu ar gwalarn. Tiez-soul bihan a oa tolpet bep al lec'h a-hed ar stêr. Tregont loariad oa e oa deuet Aada ha Narki d'ober o annez er saonenn-se gant o faotrez Gili. Lasa oa deuet da heul ivez, en desped dezhañ. Kuitaet o doa meuriad Kurnig war-lerc'h un tammig disemglev gant an amezeien. O zi o doa savet e-kichen ul lenn vihan, dour mat ha pesked niverus enni. Lasa n'en em blije ket eno, tamm ebet. Alies e tileze e dropellad deñved evit mont da redek bro. Ha dont d'ar gêr e-kreiz an noz. Trouz a gleve digant e c'hoar. En aner. C'hwec'h loariad oa e oa aet kuit da vat. Keloù ebet ken anezhañ. Kent ar mintin-mañ : « Kavet ez eus roud eus Lasa ! »

II - A-raok kimiadiñ.

Diouzh ar pardaez, echu o labour ganto – uhel e oa an heol c’hoazh –, e tiskennas ar wazed diwar roz ar grugell evit mont d’ar gêr. Hed-a-hed ar stêr edont o vale a-vandennoù, pep hini o vont d’e di. Er penn all d’an draoñienn edo Aada o chom. Prajoù glas a oa a-bep tu d’ar stêr, chatal lart o peuriñ enno. Bugale ha krennarded a oa o vaesa deñved hag oc’hen. Edont o c’hoari sevel fardelloù war ar gouverioù.

E pep kêriadenn edo ar merc’hed hag an dud kozh o labourat war-dro an tiez. Darn anezho a oa o valañ greun etre daou vaen, evit ober bleud. Yod ha bara a vefe aozet gant ar bleud-se. Darn

all a oa o turgnañ podoù-pri a-raok lakaat anezho da boazhat e ti-forn ar gêriadenn. Unan bennak a oa o tommañ traezh-bev evit tennañ c'hwalen diouto. Talvoudus-bras e oa ar c'hwalen evit reiñ blaz d'ar boued ha mirout ar c'hig-loened hag ar pesked. Ur micherour dornet-kaer a oa o troadañ bouc'hili-maen deuet diouzh ar beure gant ar marc'hadour. Mein glas flour ha teñval e oa anezho, un drederenn troatad dezho. Ur penn anezho a oa moan ha lemm evit gellout troc'hañ. Tev e oa ar penn all. Sankañ a rae ar micherour ar penn tev anezho en un tamm askorn karv, ha sankañ hemañ d'e dro en ur skourr prenn, un troatad hirder dezhañ. Binviajoù labour ha brezel a-zoare a veze savet, pelloc'h. Buan ez ae an traoù war-raok. Birvilh a oa penn-da-benn d'ar ganienn : an dud o komz, ar vugale o fistilhat, ar morzholioù o skeiñ, an tan o strakal, an deñved o vegeliat, ar saout o vlejal, al laboused o richanat...

Pa erruas Aada dirak e di-prenn, e-kichen al lenn, edo Narki o wiad neud ouzh ur stern evit sevel danvez dilhad. O merc'h vihan Gili a oa o c'hoari gant ar yer. Gouest oa da vale ha da gomz zoken. « An diar deus dozvet ur vi ! » Vi eo a lavare ha n'eo ket "U" evel he zad. Yezh ar vamm, na petra 'ta !

Pokat a reas Aada da Narki ha lavaret dezhi ar c'heloù nevez : « Kavet roud eus Lasa ». Ul liv a zeuas war ar vamm yaouank, tost dezhi semplañ. Lasa ! He breur muiañ-karet. Ganti e oa bet desavet. Ur breur karantezus, forzh pegen diaes e ve bet e spered. Ne oa ket deut Narki a-benn d'e gabestrañ. Ar c'hrennard kizidik ha blizidik a oa troet d'ur gour kreñv ha kenedus. Sot-pitilh e oa ar merc'hed yaouank gantañ. E walc'h a blijadur en deze ganto. Ne felle ket dezhañ en em stagañ da vat ouzh hini ebet anezho, avat. Anaout-mat a rae krenn-lavar ar re gozh : « Men e ve ereet ar menn e ve ret dezhañ peuriñ ». Ha manout stag a-hed e vuhez ne felle ket da Lasa. Ne oa ket bet gwall souezhet Narki pa oa aet he breur kuit. Glac'haret-bras, ne lavaran ket.

Aotre en doa bet Aada, gant an Ozhac'h-meur, da vont war glask ar paotr yaouank. A-du krenn e oa Narki ivez. Ne c'helle ket bevañ dianken abaoe ma oa tec'het he breur kuit. Da c'houde bezañ debret ur jelkenn kig karv da heul un tamm bara-toaz, ha lakaet Gili en he c'havell, ez ejont en o gwele. Hag en em garout sioulik. Gouzout mat a raent e vefe hir an disparti hag arvarus an imram.

III - War-zu ar c'huzh-heol.

D'ar ruzell-veure e kimiadas Aada diouzh e dud hag e veuriad. Pell e chomas da vriata Narki. Damgousket oa Gili etre divrec'h he mamm. He dibradañ a reas Aada dreist e benn, a-bouez e zivrec'h. Dihunet da vat e oa ar plac'hig pelloc'h, hag hi c'hoarzhin, dibreder-kaer. Ne oa ket evit kompren ne welfe ket he zad a-barzh pell. An dour en e zaoulagad e skoas ar gwaz yaouank etrezek ar mor bras, er penn all d'ar stêr. Ouzh e gein e oa ur sac'h lêr gantañ, ennañ ur vouc'hal, ur vatalm ha kontilli. En-dro d'e skoaz, gwareg ha saezhennoù, hag ur goaf en e zorn. Un tamm boued en doa kaset gantañ ivez, nebeut avat. Evel

Lasa e felle dezhañ bevañ. Aesoc'h a se e vefe e gavout.

Pignat a reas war dorgenn ar grugell. Ne oa ket kroget an dud gant o labour c'hoazh. Ac'hano e veze gwelet ar vro a-bezh, an draoñienn, ar stêr, ar mor er pelloù. En-dro d'an dorgenn edod stag da sevel kaeoù ha da doullañ kleuzioù evit ar meuriad da c'hellout talañ ouzh an enebourien a glaskfe sur mat, dont da laerezh o zraoù diganto. Alies e rebeche Lasa an dra-se d'ar gevredigezh nevez : sachañ a ra ar binvidigezh gwarizi ha brezel d'he heul. Hunvreal a rae ar paotr yaouank gant ur bed e lec'h ma vefe rannet ar madoù, kement ha kement etre an dud. Ur bed ma vefe ar peoc'h hag ar garantez o ren !

Hag Aada d'an traoñ ha d'ar red a-hed ar stêr war-zu ar mor. Bez edo ar c'hilheien o kanañ, an dud o tihuniñ en tiegezhioù. An ezhec'h hag ar gwragez a salude ar reder yaouank diwar dreuzoù an tiez. Daoust ha da belec'h edo o vont, ken abred all, e vinviñ brezel gantañ ?

Pell war-lerc'h ha berr warnañ — n'oa ket boaz ken da redek keid-all —, e tegouezhas e roc'h-meilheta Enez c'hlas. Ur mellad roc'hell uhel ha serzh a-zioc'h ar mor. Eno e veze o pesketa gant Lasa. Splujañ er mor don diwar gern ar roc'h ha pakañ ar meilhi a-unanoù. Un emgann leal e oa,